

**Berthou Erwan** : Pleuvihan 1861 – Pleuvihan 1933)  
Nominoe (bet embannet e 1869)

“Me eo an Nominoe  
Brudet eun amzer a oe,  
Braz ha kaer e oa ma Lez.  
Roue ‘oan war Vreiz a-bez :  
Me am-eus trehet ar Gall  
An Normand hag ar Saoz fall.  
Daoust hag-eñ ‘zo deut arre  
En Breiz vihan eur roue  
Ma klevan e-barz ar bed  
Komz c’hoaz ouz ar Vretoned ?...”

Taldir (Gweledigeziou).

## Nominoe

Morvan Lez Breiz, ha te maro !  
Maro 'vefe ganit ar vro !...  
War da lerh te, Roue Merzer,  
Kavoud 'rafe c'hoaz eur Zalver ?  
Piou e zegasfe d'ar vuhe' ?  
Nominoe.

Morvan 'baeas an droug-kinnig  
D'ar Gall gand houarn en e gig !  
Morvan lazet, setu on Breiz  
D'ar Hallaoued adarre preiz.  
War o roue, piou a drehfe ?  
Nominoe.

Droug-kinnig Breiz paeet e-neus  
Gand sahadou mein eur vengleuz  
« Aour dit-te, merer roue Frañs ?...  
Da benn en skudell ar valañs !  
Piou an hini reas kement-se ?  
Nominoe.

Pa gerz Nominoe, raktal  
Eh eo trehet Jarlez ar Moal,  
Trehet eh eo an Normaned,  
Ha Breiz Vihan 'zo hadsavet ;  
Ne zent nemed euz eur Roue :  
Nominoe.

O ! Roue Meur, Roue dispar !  
Dleet eo dit beva er gloar !  
Deuz Broadelez Breiz, o ! Tad !  
Dit-te on anaoudegez vad !  
Sell, unanet da vugale,  
Nominoe.

Sonet eo eur an haddihun ;  
Mez pa n'out mestr, ne vo nikun !  
Hogen, 'vid ma vi ganim c'hoaz,  
Ni 'zavo dit eur skeudenn vraz ;  
Ha pignet 'vo war eur mene',  
Nominoe.

## Nominoe, Roue Meur Breiz

Goude maro Morvan Lez-Breiz, Louiz kenta, mab da Jarlemagne, a lakaas Nominoe da rena en Breiz evel lutanant dezañ. Nominoe, an hini<sup>1</sup> a ziskenne deuz koz rouanez ar vro, 'oa eun den a spered braz hag eur brezelour dimeuz ar gwella. Servijet e-nevoa, dindan an Impalaer koz, evel jeneral.

Ar Vretoned n'o-devoa ket meur a fiziañs ennañ, dre ma oa lakaet en karg gand impalaer Bro-Hall, o enebour, ha dre ze e halvjont, evel roue Breiz, Gwignavrac'h, Beskont Leon. Mez kabitened Louiz kenta, ar re<sup>2</sup> 'oa dremdost da Vreiz, a deuas ganto armeou a drehas war ar Vretoned.

An impalaer a halvas Gwignavrac'h d'e balez hag a bardonas dezañ ; mez adaleg distroet d'e vro, ar priñs breton a zavas adarre tud a vrezel hag a redas, gwaz 'vid biskoaz, war vignoned Louiz kenta.

Ar Hont Lamber arruas d'o zikour hag a zeuas a-benn da laza Gwignavrac'h.

D'ar houlz-se an Normaned a ziskenne dre oll war vroiou ribl ar mor. Kêr ar Yeoded, e-kichenn Lannuon, an hini<sup>3</sup> a oa eur gêr vraz, 'oa en dismantr dindan al laeron-vor-mañ. Nominoe a yeas a-dal deze gand e zoudarded, mez ar holl a vanas kement en eil tu evel egile. Koulskoude an Normaned, goude bet prenet boued, a bignas war o listri hag a guitaas ar vro.

Impalaer Bro-Hall 'nevoa meur a reuz dre leh all hag a leze ar Vretoned da alani. Ar re-mañ a gemeras an digarez-se evid kinniga ar gurunenn a roue Breiz da Nominoe, rag beza o-devoa meur a hrad dezañ, ha meur a fiziañs o-devoa lakaet ennañ goude ma 'nevoa gwallgaset an Normaned war ar mor.

Ar maro 'skoas an Impalaer gall en amzer-ze. E vugale, evid lodenni o danvez, n'arruent ket da 'n em glevoud. Tra-walh o-devoa d'ober etreze.

Nominoe ne chomas ket da hoari. Bounta a reas ar Hallaoued e-mêz ar vro, terri a reas lezennou Jarlez Veur, troha a reas oll hualou Breiz, ha rei a reas dezi he librentez evel gwechall. Hadsevel a reas ivez mogeriou ar hestell, ha lakaad a reas enne e zoudarded.

E labour 'oa êzetaet dezañ dre ma oa brezel heb diwez etre daou vab an Impalaer maro, etre Jarlez ar Moal ha Louiz ar Jermaneg. Ar hont Lamber, an hini<sup>4</sup> 'oa mestr war gêr an Naoned, a roas dorn da Nominoe hag o-daou e rojont eul las da dud ar oue Jarlez ar re<sup>5</sup> 'oa dindan urz ar hont Renaud.

Hogen Lamber ne gavas ket 'oa greet tra-walh a stad dioutañ ; c'hoant e-nevoa da veza lakaet perhenn war an Naoned ; evid se e houlennas sikour digand an Normaned. Ar re-mañ a zavas eta d'an Naoned, war o bagou, hag a zeuas buan a-benn diouti, hep poan, rag ne oa mestr ebed evid he divenn. Distruja rejont ar mogeriou hag ar venehi<sup>6</sup> ; laza 'rejont an eskob, ar veleien hag ar veneh, ha lakaad 'rejont ar vro dre oll en tan hag en gwall. Lamber 'n em gavas neuze mestr rik an Naoned.

Goude meur a drubuill, bugale Louiz kenta a zeuas da 'n em glevod. Jarlez ar Moal en-devoa bet Bro-Hall evid e lodenn ; mez ne oa ket trawalh evitañ :felloud a ree c'hoaz dezañ kaoud ivez Breiz ; ha setu-eñ o tond, en penn d'eur bern braz a dud a vrezel. Hogen roue Breiz, Nominoe, 'oa war evez. Mond a reas, gand e oll nerz, renet gantañ e-unan ha gand e niz Salaun, mab d'e vreur Rivallon, a-dal d'ar roue frank. Dond a reas a-benn da zrailla arme ar Hallaoued etre ar Mans ha Chartres, pe c'hoaz, hervez 'lavarer ivez, war zouarou Redon<sup>7</sup>.

---

<sup>1</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>2</sup> ar re :pere, er skrid orin.

<sup>3</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>4</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>5</sup> ar re :pere, er skrid orin.

<sup>6</sup> venehi : ar manatiou.

<sup>7</sup> **Notenn** :Les guerres contre les Bretons (843-851)

Goude an taol kaer-ze, ar Vretoned, en despet da dud ar roue Jarlez, a ree brezel dre oll 'barz ar broiou nesañ da Vreiz. Ar hont Lamber, an hini<sup>8</sup> n'halle ket chom en peuh, a rankas kuitaad an Naoned dirag gourdrourz Nominoe. Mervel a reas, hebdale, en eul leandi merhed, e-kichenn e hoar, an hini<sup>9</sup> 'oa leanez eno.

Eun nebeud bloaveziou goude, roue Breiz hag e arme a dremenas ster al Loire hag a gastias ar broiou 'zo stlabezet en tu all. Se 'reas kement a boan-galon d'ar roue Jarlez, ken e teuas gand eun niver braz a zaoudarded evid stourmi ouz roue Breiz. Mez hemañ, eur wech all, a honeas c'hoaz an treh.

Neuze Nominoe, o weled pegen nerzuz 'oa arru, ha penaoz n'e-nevoa ken da gaoud aon rag ar Hallaoued, a zoñjas 'n em gurunenni dirag ar Bed, evel rouanez Bro-Hall. Lidou meurbed kaer, en enor da gement-mañ, a zavas en kêr Dol, er bloavez 824, dirag eur bobl deuz ar brasa, leun a joa ha karget a anaoudegez evid eun den a gement a isign<sup>10</sup> vad hag a skiant, an hini<sup>11</sup> 'nevoa saveteet Breiz a-nevez, roet dezi eur splannder ken kaer, ha lakaet hi da veza doujet gand heh enebourien.

Nominoe a grouas eun arheskopti en kêr Dol, an hini<sup>12</sup> 'dlee kaoud dindan e urz oll eskoptiou Breiz. Eskob an Naoned, anvet Aktar, ne blijas ket dezañ an urz nevez, hag a zougas klemm d'ar roue gall. Hemañ 'anaveze penaoz ne oa ket brao kaoud kasoni Nominoe ha ne gavas mann gweloh eged rei eskopti Chartres d'an eskob didronet evid e zigoll.

Sant Konvoyon 'oa d'an amzer-ze tad-manah en leandi Redon. Ar vrud dimeuz e vuhez fur ha dimeuz e vuzudou a nije dre oll. Ar Roue Nominoe a gemeras ali digantañ meur a wech hag hen selaoue evel eun den sklêrijennet gand Doue e-unan.

Sant Konvoyon 'n em glemmas dimeuz eun nebeud eskibien ar re<sup>13</sup> n'o-devoa ket eur vuhez reiz hag eeun, dimeuz eskob Gwened, dreist-oll. Ar Roue Nominoe a zegemennas aneze dirag eur strollad eskibien vad, doktored deuz an Iliz, ha tud gouizieg war al lezennou ; mez an ali a drehas e lavare penaoz 'oa red d'ar pab e-unan rei ar varn war gement-mañ.

Nominoe a gasas sant Konvoyon da Rom en e leh, evid breutaad 'eneb d'an eskibien. War an heveleb tro e tlee rei d'an Tad Santel, Leon IV, eur gurunenn aour a-berz roue Breiz, en eur houlen digantañ kaoud ar vadelez da zisklêria dre oll 'oa Nominoe ar gwir Roue war Vreiz. Beza 'oa gantañ, d'e heul, daou-ugent dijentil dimeuz ar furra, ar re<sup>14</sup> a bokas da dreid ar pab, a-berz o mestr. Sant Konvoyon a reas eur vreuradenn helavar, er yez latin : « Deut on, emezañ, o ! Tad Santel, da rei deoh eun testeni a zentidigez en ho keñver, a-berz an Trehour braz, ar Roue gallouduz 'zo o ren war ma bro. Setu amañ, kinniget deoh gantañ, eur gurunenn aour, kizellet gand ijin kaer, ha steredennet gand mein kaer deuz ar brasa talvoudegez. Ho madelez, d'he zro, mar plij ganti, e roio da Vreiz, d'he Roue ha d'he fobl, eur merk dimeuz he

---

En 841, Charles le Chauve reçoit le serment de Nominoë, missus de Bretagne sous Louis le Pieux. Par ailleurs, il confie à un fidèle aquitain, Bego (Bégon) la défense de la rive sud de la Loire ; Bego installe à quelques kilomètres de Nantes une place forte (à l'origine de la localité de Bouguenais), mais il va être victime de dissensions au sein du camp franc.

Dès 843, les hostilités sont déclenchées entre Charles le Chauve et Nominoë. En 845, lors de la bataille de Ballon, Nominoë remporte une victoire sur Charles le Chauve. Un premier traité est conclu en 846 : Nominoë devient souverain de Bretagne.

:Lors de la reprise des hostilités en 849, les Bretons mènent de nombreux raids en Francie occidentale (Maine, Anjou, Poitou), et s'emparent des cités de Rennes et Nantes.

Le 22 août 851, Charles le Chauve est battu par Erispoë, lors de la bataille de Jengland. Cette défaite le conduit à signer au mois de septembre suivant le traité d'Angers qui cède à Erispoë les comtés de Rennes et Nantes ainsi que le Pays de Retz, et lui reconnaît le titre de roi en échange de l'hommage.

Quelques années plus tard, sous le règne de Salomon, nouveau roi de Bretagne, Charles est encore obligé d'accepter une extension du royaume breton. Le 1er août 10 ou le 25 août 867, par le traité de Compiègne, Charles le Chauve concède à Salomon la péninsule du Cotentin et l'Avranchin.

<sup>8</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>9</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>10</sup> isign : ?

<sup>11</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>12</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>13</sup> ar re : pere, er skrid orin.

<sup>14</sup> ar re : pere, er skrid orin.

harantez ha dimeuz ar stad vad a ra diouzim, en eur rei din relegou benniget eur zant bennag, ar re<sup>15</sup> a lako war Vreiz diwall an Aotrou Doue. »

Goude-ze, Sant Konvoyon a zisplegas d'ar pab ar hlemmou 'nevoa d'ober diwar-benn an eskibien, hag ober a reas dezañ al le ma n'en-devoa en gwel nemed mad an Iliz ha mad e vro.

Ar pab, goude beza bennaonet Konvoyon hag e dud, a roas dezañ penn Sant Marsillan, pab, an hini<sup>16</sup> 'oa bet merzeriet en Rom dindan ren an Impalaer Dioklesian. Mez war pezh a zelle an eskibien, ar pab ne reas ket a van dimeuz klemmou Nominoe ; ne roas ket ouspenn an testeni a houlenne ar roue diwar-benn e gurunennaj.

Kement-se 'roas keun da Nominoe da veza kaset Sant Konvoyon da Rom ; ne reas ken goude nemed dre a benn e-unan. Ober a reas en Redon eur hendalh dimeuz e guzulierien, an hini<sup>17</sup> a varnas an eskibien evid ar wech diwezañ. Ar re-mañ, buan, a dehas da Vro-Hall, daved Jarlez-ar-Moal.

Mez ar Roue Jarlez a dlee paea an degemer roet gantañ d'an dud-se. Nominoe 'zavas e armeou hag a dremenar war vroioù ar Poitou hag ar Maine evel eur barr-avel euzuz. En eur lakaad an dismantr war e hent, eh arruas dirag kêr Poitiers. Roue Bro-Hall, fuloret, a zastumas buan daou-ugent mil soudard hag a redas war-lerh Nominoe, an hini<sup>18</sup> a dehas goustadig gand eur bern madou skrapet.

Roue Breiz n'evoa nemed ugent mil soudard, archerien war droad ha war varh, mez pep hini 'reaz e zever evel m'eo dleet. En arme Jarlez 'oa eur bagad Saozon, ar re<sup>19</sup> a roe dezi ar peurvuiañ dimeuz ha nerz ; mez o benvioù brezel a oa kalz re bounner. Ar Vretoned o-devoa kezeg hag armou skañv, ha dre ze e nijent en-dro d'ar Zaozon en eur skei reut hag eeun, hag hep tapoud gwall ebed. Ar Zaozon a spontas buan hag a droas o hein. Ar Vretoned a heulias aneze kement ha ken bihan, o vounta houarn en o hig, ken ne chomas ket eur Zaoz nag eur marh heb beza gouliet. Beteg an noz teñval e padas an emgann, hag ugent-mil soudard da Jarlez ar Moal a vanas an deiz-se war al leur-vrezel. An deiz war-lerh, euz ar beure, ar Vretoned a lampas adarre war ar Hallaoued gand kement a dan hag a nerz, ken e weled ar re-mañ o redeg, penngollet evel eur bagad deñved. An emgann n'echuas adarre nemed gand an noz ha pa 'nevoa gallet enebourien ar Vretoned mond en diwall en o hamp.

En e hlahar braz, ar roue Jarlez a gollas e benn : e-pad an noz e kuitas e arme hag e redas gand ar foeltr da Bariz. An deiz war-lerh al lutaned, o weled kollet ar Roue, a gemeras pep hini an teh, heb lared ger, hag ar zoudarded evelte. Mez ar Vretoned, goude beza dihunet deuz eur housk diskuizuz, o weled ar Frañsizen o redeg evel gedon etrezeg ar parkou, a gouezas warne evel chas kounnaret. En hucha a-bouez o fenn, e lakjent o enebourien da beurgoll o skiant. Nebeud a vanas beo da gas kelou dimeuz ar holl spouronuz-se. Kamp ar Hallaoued 'oa leun a binvidigez. Ar Vretoned a zistroas d'ar gêr, sammet gand madou ar Roue Jarlez.

Goude eun treh ken braz, Nominoe 'welas e vrud o redeg d'ar broioù pella ; beva a reas en peuh beteg e varo. E blijadur vrasa 'oa komz gand Sant Konvoyon, en abati Redon, ha selaou e brezegennou kaer. Servij 'ree Doue, e-unan, evel eur hristen mad. Sevel a reas eun abati all en-kichenn Dinan, en Lehon, en hini<sup>20</sup> 'reaz degas, deuz enezenn Jerzay, relegou sant Magloir, koz arheskob<sup>21</sup> Dol ; ober a reas ivez sevel korv Sant Gwennaël, 'barz en menehi Landevenneg, evid hen lakaad en eun arched arhant alaouret.

Ober a reas c'hoaz eun taol kaer 'raog mervel : kaer Angers 'oa gouarnet gand an Normaned ; Nominoe o stlabezas e-mêz ar vro-ze ; ha kent distrei da Vreiz e savas taillou war broioù an Anjou, an Touraine ha Vendome.

---

<sup>15</sup> ar re : pere, er skrid orin.

<sup>16</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>17</sup> , an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>18</sup> an hini : pehini, er skrid orin.

<sup>19</sup> ar re : pere, er skrid orin.

<sup>20</sup> en hini : e pehini, er skrid orin.

<sup>21</sup> koz arheskob : arheskob koz

War-dro ar bloavez 851 e varvas ar Roue braz-mañ, an hini hadroas da Vreiz heh enor hag he librentezou, en eur ziframma ar habestr lakaet dezi gand an Impalaer Jarlemagn.

Nominoe eo ar henta Roue 'nefe renet war oll zouarou Breiz ; a-raog, Breiz a oa rannet etre eun nebeud konted. Nominoe e-neus bet an enor braz da lakaad Breiz vihan da drehi war Vro-Hall.

Galloud 'reom-ni lavared eo brasa Roue he-deus bet or bro, evel ma'z eo ivez Tad on Broadelez.

Dleoud 'reom hirie, en despet d'ar bell-amzer, selloud outañ evel ouz eun tad. E skeudenn a zav bepred er pellder, evel hini unan deuz an dud vrasa 'zo bet ar ar Bed.

Enor, karantez, doujañs da Nominoe, Roue Bretoned an Arvor ! Breiz da virviken !

**Notenn gand Embann an Hirwaz** : broadelour e oa Berthou ; Hervez an istorourien en-doa ijinet meur a dra.